


27

SANT ILTUD

gant

An Otrou MENGUY, person KOADOUT



Skeudennet gant an Dimezel MARI LABÉGASSIÈRE



Moulez ru ar C'hastel, 4, Brest.

1922

FB
249.
6
ILT

38287

SANT ILTUD


GANT

Felix-Done
An Otrou MENGUY, Person Koadout



Tennet eus **BUHE AR ZENT**

SAVET GANT AR BOLLANDISTED



(Acta Sanctorum Novembris, T. III)



60
249.
S
ILT

NIHIL OBSTAT.

J.-B. CARLUER,
cant. tit. cens.

Imprimatur :

Brioci, die 28 Junii 1922.

Y.-M. LE PENNEC,
Vic. gén.



Document numérisé en 2021



ILIZ KOADOUT, - An ôter vras.



BUHE SANT ILTUD

I. — YAOUANKIZ SANT ILTUD.

Iltud a c'hanas en Breiz-Veur, en rouantelez Gladmorgan, wardro ar bla 500. E dad, hanvet Bikan, a oa eus eul ligne uhel a dud a vrezel hag a c'houarne Breiz-Izel en hanb Amblaud, roue Breiz-Veur. Ken karet e oa gant e dud ha gant ar roue ma teurveas rei, d'ean evit pried e verc'h Rieingulid, prinsez koant meurbed ha, dreist-holl, madelezus ha fur dispar. Doue a roas d'ê hep dale eur mab hag a voe hanvet Iltud. Savet mat e voe gant e dud ha desket d'ean abred bean karantezus evit e genvroiz. Prestik goude, sant Jermen, eskob Auxer, o vean deut da Vreiz-Veur, Iltud hag a oa niz da c'hoar sant Jermen a dreuzas ar mor evit ar wech kentan da zont d'ar skol daved an eskob santel. Eno e kavas c'hoaz eus e genvroiz, en o zouez sant Brieg a dlee goudeze dont da vean eskob kentan Sant-Brieg.

Iltud, dre ma oa speredet lemm dispar, a deuas prim da vean desket meurbed. Awalc'h e vije d'ean bean klevet eun dra eur wech, mac'h ouvee anean dre envor. Tapout a reas da gentan an holl diplomou anaveet en amzer-ze hag ar vrud eus e ouiziegezh a yeas hep-dale koulz en Bro-C'hall evel en Breiz-Veur. Da gomz ive e oa eur mestr; ne oa hini trec'h d'ean.

Pa voe distroet d'ar gêr, e c'hoantaas bean soudard evel e dad; hep dilezel e studi, e teuas da vean e nebeut amzer eur zoudard eus ar gwellan.

II. — ILTUD E TI, AR ROUE ARZUR HAG E TI AR ROUE POULENT.

O vean klevet pegen kaer arme en devoa e genderv, ar roue Arzur, e teuas c'hoant d'ean da vont d'e balez hag e treuzas ar mor evit mont betek eno. Digemeret e voe eus ar gwellan ha laket er renk uhelan etouez ar zoudarded. Ac'hane ec'h eas da di Poulent, roue Gladmorgan. Arru mat e voe gantan; heman a anaveas prim

en devoa d'ober gant eun den a spered lemm hag eur c'homzer helavar; an holl a lare ne oa den er vro ken desket na ken gouiek war bep tra. Roet e voe d'ean ar garg kentan er rouantelez, laket e penn ar zoudarded hag ar gouarnamant. Ren ha gouarn a reas eus ar c'hentan; en eur blijout d'ar roue, e klaske bepred lakat ar peuc'h barz ar vro. Harpan rê e c'halloud war lezenn Doue; deski a rê anei d'ar re n'he anavezent ket ha, bep ma teuent d'he anavezout gwelloc'h, e klaske ar stumm da zével bepred uheloc'h ar sperejou warzu Doue ha treo ar bed all. E zoudarded a lare: « Hon mestr a zo eur zoudard mat; bean eo ive ar furan eus an dud. »

Eun devez ma oant et da chaseal war douar sant Kado, ec'h ejont da gât an abad santel, da lavaret d'ean rei d'ê da zibri pe e kemerjent en despet d'ean. Ar zant, daoust ma ne oa ket goulennet brao digantan, a roas d'ê, koulskoude, ar pezh o devoa ezomm evit prejan. Azezan a rejont da leinan, met n'helljont ket dibri, rak Doue, evit kastizan anê da vean goulennet boued er stumm-ze, a zigoras an douar elec'h ma oant azezet hag e voent lonket holl. Iltud ne oa ket gante d'ar mare-ze, rak, droug ennan o welet anê o vont d'ober eun dra hag a zisplije da Zoue, en devoa kemeret an tec'h evit tremen hep dibri eus ar boed danzeet er giz-ze. Pa welas e gensorted lonket gant an douar, e teuas doan d'ean. Mont a reas glac'haret bras da gât sant Kado ha, daoulinet dirakan, e c'houlennas pardon ha kuzul ive evit an amzer da zont. E tu-hont d'an aliou all a roas d'ean, sant Kado a laras: « Doue a fell d'ean gwelet ac'hanoc'h o tilezel an enoriou, an arme hag ar bed, evit dont da vean beleg, servij anean hed ho pue ha gounit ar baradoz. » Iltud a felle d'ean senti: distrei a reas raktal da di Poulent da lavaret d'ean e tileze e vicher a c'houarnar hag a vestr-arme evit 'n em rei a-grenn da Zoue. Ar roue, ar rouanez, an dud holl a voe glac'haret bras o welet anean o kuitât. 'N em denn a reas gant eun nebeudig all war ribl ar stêr hanvet Nadav; dre ma oa an hanv, e loskajont o c'hezec da beuri er prajeier; int a reas gant brankou eun tamm toenn 'us d'o fenn evit gallout repoze gwelloc'h.

III. — EUN EL O TONT DA GAT SANT ILTUD.

Epad ma oa kousket Iltud, eun el a deuas d'hen kât hag a lavaras d'ean: « Bet out soudard mat gwechall ha karget a enor gant ar rouane ! Dalek breman e vank d'it servi Roue ar rouane ha dilezel treo ar bed hag a dremen ken prim. Bez sonj penôs da dud o devoa lakat ac'hanout war ar studi beleg ha grêt az poa ar studi-ze evel ma oa dleet; goude, teus bet dilezet evit an arme; »

adkemer an hent kentan gant doan da gouezan en pechou an drouk-spered, rak hen a zo o voutan ac'hanout barz an enoriou evit koll ac'hanout da viken.

Daoust d'it ne welez ket anean, hen a wel ac'hanout ha, mar ne gerez diwall, e teuo a-benn diouzit. Bez eta war evez betegout na ves touellet gant enebour Doue hag an dud. Klask a ra noazout ouz an dud a zo war an douar hag en nenv; droukoc'h eo evit eul leon, primoc'h evit an evn; bean eo ar chaseer ha ne weler ket; mont ha dont a ra o klask laerez ha noazout bepred. Varc'hoaz, dalek ma savi, ke d'ober da chomaj 'barz ar zaon leun a goad a zo war an ôd, 'tu ar C'huz-heol... Bolonte Doue eo! Al lec'h-ze a zo eus an dibab... Setu perak on bet digaset d'it gant Doue; disklêriet am eus e volonte; grez ar pezh zo gourc'hemennet, hep chom da glask digare. »

An el a yeas kuit. Iltud, pa zihunas, en em lakas da adtremen dre e spered ar pezh en devoa klevet; dont a reas sonj d'ean eus gourc'hemenn-man an O. Doue: Neb a gar e dad pe e vamm, breudeur pe c'hoarezed, pried pe bugale mui evidon n'eo ket ma gwir zervijer.

Senti 'ra ouz an O. Doue; dilezel a ra e zoudarded, enoriou ar bed; kuitât a ra anê holl, ha setu hen eh hent, trezek an draonien choazet evitan.

An draonienn-man a oa hanvet Hotnant. Pan arruas eno, Iltud a welas ervad e oa gwir komzou an el: bean 'oa eno douar eus ar c'hentan, koajou leun a bep seurt gwe; eur stêr a dremene dre ar c'hreiz; andoniou ha ruzelennou dour a rê d'an treo kreski 'n eun tîl. Iltud a blijas al lec'h-ze d'ean hag a daoulinas da drugarekat an O. Doue.

IV. — ILTUD HAG AN ESKOB DUBRISIUS.

Iltud a grogas raktal gant labour e zilvidigez. Mont a reas da gât Dubrisius, eskob Landaven, evit 'n em lakat dindan e zorn ha digemer an urzou zakr. Dubrisius, rôk rei digor d'ean en e gloerdi, a roas d'ean pinijenn d'ober evit pechejou e vuhe dremenet. Ober a reas d'ean touzan e varo hag e vleu ha ne lezas gantan nemet eur gurunenn vleu endro d'e benn. Goude, Dubrisius o vean bet kelennet gant Doue a roas d'ean an urzou zakr hag a lavaras d'ean distrei d'al lec'h merket gant Doue. Gourc'hemenn a reas d'ean c'hoaz penôs en em gemer evit sevel e gouent hag eur chapel en enor d'an Dreinded santel.

Iltud a zavas eun iliz evel ma oa urzet d'ean. Adalek neuze, e renas eur vuhe a binijenn vras: yun ha beilhal a rê evit gallout derehel da bedi hirroc'h amzer; ne

veve nemet gant ar pezh a vije digaset d'ean evel d'eur paour. Ne gonte ket war an dud-all d'ober e labour ; hen e-unan a labourer herdan m'helle. Da hanter-noz e save, en em walc'he ervat evit chom dihun ézetoc'h ; 'pad ma vije o'n em walc'hi, e lavare ter bater ; neuze ec'h ee d'an iliz hag e chome eno war bennou e zaoulin da bedi betek ar beure.

Ken troet e oa gant ar bedenn ma welet sklér ha reiz n'en devoa na sonj na komz nemet evit Doue. Eleiz a dud, o klevet hano anean, a diredas d'ar gouent hag Iltud a zavas eno eur skol vras 'lec'h ma vije desket an holl skianchou.

V. — KENTAN BURZUD SANT ILTUD.

Ar roue Merthian, lezhanvet Vesan, o vean eun de o chaseal, a lôskas e chas warlerc'h eur c'haro ; heman, oc'h ésa tec'hel en o rôk, a antreas en lochen sant Iltud, 'vel da c'houlén repu digantan. Gourvez a reas ouz treid ar zant evel eul loen danv. Ar chas hag a gase hag a harze ken a rênt, da c'hortoz anean da zont erméz, a baouezas neuze da harzal. Ar roue souezet a gement-man a deuas priman ma helle 'trezek lec'h m'en devoa klevet e chas hag hen d'arruout dirak lochen sant Iltud. Pa welas eno e chas o c'hoari gant ar c'haro, ha heman dous evel eun oan, e kouñnaras ouz an ermit santel, o tamall d'ean e oa deut eno da chom heb e ôtreadur.

— Ar c'haro-man a zo d'in ! emean.

— Ne vo ket ! eme sant Iltud. Koulskoude, ma plij ganec'h, ho pedan d'antren em feniti.

Ar roue a gemeras doan ha, daoust d'an droug a oa ennan, o welet pegén fur e oa an ermit, ne gredas ket antren. Leuskel a reas ar c'haro gantan. Heman, goude ze, a voé staget gant sant Iltud ouz ar c'harr da charre koad ha mein da zével ar gouent.

Ar roue en devoa naon. Iltud a bedas anean da zibri ; met o vean n'en devoa netra da ginnig d'ean, e kasas unan eus tud ar roue da besketa d'ar stang a oa e kichen. Distrei a reas soudén tapet gantan eur pikol pesk. Poac'het e voé ha digaset d'ar roue. Ne c'houlénas ket tanva dioutan, dre ne oa na bara na hollen da zibri gantan. Iltud a lavaras d'ean : « Mestr, an oll dreo hag an holl vadou a roio d'ec'h ar c'hras da gaout ar vlaz a blijjo d'ec'h gant ar pesk a zo dirakoc'h... »

Ar roue a asantas neuze dibri. Tanva a reas anean ha kêr a reas gantan blaz ar meujou gwellan a heller

da zerviji ouz töl : « Ma m'ije bet breman, da evan, gwin pe chufere, e vije bet heman eur pred eus ar c'hentan ! »

Sant Iltud n'en devoa na gwin na chufere, met lavaret a reas d'ar roue, en eur lakat dirakan dour eus ar feunteun, e kavje anean herve e c'hoant. Evan a reas hag, en gwirione, kêr a reas gant an dour blaz ar gwin hag ar chufere ar gwellan.

Goude bean debret hag evet, ar roue a vanas kousket. Epad e gousk, eun êl a deuas d'hen kêr hag a gomzas outan er stumm-man :

« Te, emean, roue Merthian, a zo bet hag a zo c'hoaz eun den fall hag e vank d'it chench hepdale. Gwelloc'h a gavfes gwelet aman loened goue evit servijerien Doue. Töl plé mat n'argasfes Iltud ac'han ! Gwaz d'it ma ne c'houlénnez ket leuskel anean ; da rouantelez a vo distrujet ha te n'az tevo ket a vugale. Ro d'ean eta ôtreadur da chom aman hag an draonienn-man a vo tud enni betek fin ar bed. Piou a c'houlénfe argas an den santel a zo deut aman abeurz Doue ? Dont a raio hepdale da vean eun abad brudet bras, karet ha doujet gant an holl. Neb a rei poan d'ean a vo kastizet ! Diwall 'ta ouz an O. Doue ha töl plé, adalek breman, da vean kri ha digalon e kenver e zervicher !... Goliath ive gwechall a zonje gantan ne oa den evit dont a-benn anean hag a oa bet diskaret gant an den yaouank David. Iltud, mignon an O. Doue, hag an eus laket e fiars ennan, a drec'ho war e holl enebourien. Biskoaz den santeloc'h ne vevas war douar Breiz-Veur ! Eleiz a dud a yelo d'e chilaou. Na prins, na roue n'hellô klask afer outan, 'met senti refont holl ouz e gelennadurez.

Iltud, dous evel eur goulm, a vo sklerijenn ar vro ! »

Ar roue a zihunas ha chenchet a-grenn gant ar c'homzou-ze, e lavaras dirak ar re a oa gantan : « Iltud, servijer evurus an O. Doue, a greiz kalon hag evit ma zilveridigez, e roan d'it an draonienn-man. On o paouez klevet gant eun êl eo arabad d'it kuitat. Keit ha ma vin roue, me ne rin netra evit enebi ouzit ; libr e vi aman e kenver an holl. Digas tud da labourat an douar-man ; n'eus ket gwelloc'h nep lec'h ; aman e ye eostou, frouez ha bokedou a bep seurt. Lavaret a ve eo an Itali eur vro binvidik, houman a zo gwelloc'h ha n'eo ket ken tomm. Aman ne ve na re domm na re yen. Bez evurus o kêr seurt douar-man da labourat. Dont a rei kalz d'ar skol davedout ha d'az chilaou... Ac'hanta, dre ma galloud a roue, me ro d'it al lec'h-man gant an holl douar az peus ezomm da zével da vanati hag holl dud ar vro a vo da zujidi ! »

Iltud a chilaouas ar roue ha, goude bean trugarekaet Doue, e tisklerias d'ar roue e kemere gant plijadur an douar a roe d'ean hag e c'houlenne digant Doue pardoni d'ean e bec'hejou tremenet. Ar roue chenchet a-grenn a distroas d'e balez en eur drugarekat an O. Doue eus ar pezh en devoa gwelet ha klevet.

VI. — Iltud hag e ziskibien.

Iltud a vevas eno adalek neuze didrous ha didrabas; labourat a reas e zouar. Hen e-unan a vije bepred er penn kentan; tud diwardro a zikoure anean ha dastum a rê eostou eus ar c'hentan. Magan rê ar beorien; rei a rê d'e dilhad; mont a rê da welet ha da gonforti an dud klanv hag ar brizonerien.

Kant a dud a vage evelse bemde, etre e zervicherien, ar gloareged hag ar beorien.

Kammed ne nac'he lojeiz na tân ouz ar paour. E blijadur a veze digemer anê, n'eo ket evit klask meuleudi na gloar ar bed, met dre humilite ha dre garante evit Doue hag an dud.

Eleiz a skolaerien a deuas d'ar mare-ze d'ar manati d'ar skol daved sant Iltud. En o zouez e welomp sant Pôl a Leon, sant Samson, sant Gweltas, sant David ha meur a hini all eus sent Breiz-Izel, rak Iltud a zo, e gwirione, tad sent Breiz-Izel.

VII. — Sant Iltud, beleg hag abad.

Er mare-ze, Iltud a oa bet beleget gant an eskob Du-brisius ha, dambrest goude, e voe savet gant ar venec'h d'ar garg vras a abad, abalamour d'e zantelez ha d'e vadelez. An abad neye en em lakas raktal da boanial evit gloar Doue ha silvidigez an eneou a oa endro d'ean. Hanter-kant chaloni a gargas da ganen an ofis santel, noz de, ha da brezek d'ar bobl. Peb hini en devoa e di, e breshitoar, met pezh a c'hounezent a vije roet d'an abad ha laket er memez yalc'h; ac'hane, Iltud a roe da bep hini, herve e ezomm, hag ar peurrest a vije rannet etre ar beorien (1).

(1) Herve ma lavar eur skrid koz hanvet *Triades wallicae*, Iltud a reas kanen ar psalmou santel en e vanati gant 100 eus e venec'h, o chench heb eur, koulz en noz evel en de. Kalz a c'hellfe kaout kement-man souezus, rak penôs e c'hellfe bean er memez kouent ken lies a vanac'h evit gallout 'n em eilan er giz-ze, 100 heb eur, pezh a rafe 2.400 manac'h ? N'hon deus ket da vean souezet a gement-man; goût a reomp erfad pegement a dud a direddas d'ar skol daved S. Iltud hag eur skrivagner santel, *Bède le Vénérable*,

VIII. — Ar mor oc'h ober gaou ouz douar sant Iltud.

Renet gant an abad santel, an treo ac'h ee mat-tre er manati, nemet e teue alies tôleou-mor, pa vije gwall-amzer pe koulz ar moradou bras, d'ober kalz a c'haou ouz ar parkeier tro-war-dro. Eur wech, zoken, e teuas an dour betek bered ar manati. Iltud a reas sevel war ribl ar mor eur voger grêt gant mein ha simant da harz an dour da zont pelloc'h. Leuskel a reas hepken plas da redek evit ar wazienn dour a dremene dre e barkou. Bec'h oa d'al labour bean achu ma voe dispennet a-grenn gant eun töl-mor spontus. Sevel a reas eur voger ledanoc'h; ne harpas ket mui ouz ar mor hag an arne. Adober a reas ar memez labour evit an dervet gwech; adarre e voe kont memez tra. Iltud a glemmas neuze da Zoue: « Daoust d'am c'hoant chom aman, n'hellan ket hen ober, rak an dour a ra re a c'haou ouz an treo hag a deu, zoken, betek ar vered hag an iliz hon deus bet kement a boan o sevel. Plijet ganac'h, ô ma Doue, disklêrian d'in pelec'h e tlean monet. »

Iltud a oa o sonjal kuitat e vanati, pa deuas, en noz diarok, eun el da lavaret d'ean: « Abeurs Doue, emean, e tifennan ouzit kuitat al lec'h-man a zo bet dibabet evidout gant Doue e-unan. Klevet am eus da bedenn; netra ken ne deuijo d'ober gaou ouz da dreo. Varc'hoaz ar beure, goude ma 'z tevo lavaret an oferenn, kemer eur vaz ha kê d'an ôd; ar mor a souzo, gant doan ouz da vaz, na biken mui ne distroio pelloc'h evit ma 'z tevo merket d'ean. »

An de warlerc'h ar beure, Iltud a yeas d'an ôd; 'vel ma oa lavaret d'ean, ar mor a souzas hag a souzas betek lec'h m'en devoa c'hoant ar zant.

Merkan reas war an trêz, d'ar mor, pegeit e c'helle dont ha goude ne deuas ken pelloc'h. War an ôd, Iltud, gant e vaz, a reaz eun tamm toull hag aboue zo eno eur

en deus displeget istor Iliz Breiz-Veur ha dreist-holl, hini kouent vras Benchor, a gont d'imp penôs eno e oa kement a venec'h ma rent evel seiz kouent en unan, hag e oa, d'an nebeutau, 300 manac'h e pep hini. Red eo d'imp sonjal ervat penôs ne oa ket kont gwechall er manatiou evel m'eman hirie. Hirie int savet holl endro d'eun-iliz pe d'eur chapel ha klozet gant eur voger vras hag uhel. Gwechall, ar c'houentchou a oa evel eur vro a-bez. Bean vije oupen eun iliz, herve ezommou ar venec'h hag an dud, evit ne renkjet ket kaout re bell d'ober evit mont d'an ofis. E giz-ze e oa kont en manati S. Iltud. An dud-ze, dastumet ha gouarnet gant o abad santel a reas oberou burzudus. Ne oa ket awalch d'e pedi, bevan oa d'ober ive. 'N eur ober berr amzer, ar vro-ze a deuas da vean, dre o labour ha gant bennoz an O. Doue, eur vro pinvidik meurbelec'h ma vije eostou eus ar gwellan, evel m'hon deus disklêriet diagent. Lavaret a rêr penôs S. Iltud en deus desket ar gwir stumm d'arat ha da drei douar evel ma ve grêt breman.

feunteun karget hepred a zour sklêr hag a ro ar yec'hed d'ar re glanv. Lec'h ma teue, 'rôk ze, ar mor, e teuas da vean prajeier ar gwellan e vije laket enne da beuri loened ar manati. Iltud a distroas d'ar gêr en eur drugarekat an O. Doue eus ar pezh en devoa teurvezet ober evitan hag evit e gouent.

IX. — AN EVNED O TISMANTR ED SANT ILTUD.

An eost a deuas prestik, met eur vandenn evned en em lakas da dibri an ed ken e skarzent an toc'had a-grenn. Iltud, o welet kement-se, a roas urz d'ar skolaerien da vont, an eil warlerc'h egile, da vesa al lapoused. Eun devez e oa tro Samson; c'hoant mat en devoa da blijout d'e vestr 'n eur diwall an eost diouz al loened askellet, met daoust d'e holl aked, e feujont hepred war an ed. Samson en em lakas da bedi Doue ha da c'houlenn digantan eur stumm bennak da harz anê da zismantr an trêvajoù. Doue a roas d'ean ar pezh a c'houlenne; an evned ne voent ken evit nijal ha Samson, joa vras ennan, a reas d'e mont dirakan evel eur vandenn saout hag a zerras anê en eur c'hud. Kontan reas d'e vestr petra oa c'hoarvezet. Iltud a deuas gantan da welet an evned prizoniet, a c'hourdrouzas anê dre ma teuent da zifreuzan e dreo; goude ze o lôskaas da vont kuit ha pelloc'h ne voent ket distroet da zismantr an ed.

X. — SANT SAMSON HANVET ESKOB DOL.

Ar burzud grêt gant Samson ac'h eas ar vrud anean da bell-bro, ha dambrest, tud eus Breiz-Izel a deuas d'ar manati da c'houlenn Samson evit bean eskob Dol. Iltud a roas e ôtrethur ha Samson n'hellas ket tremen hep zenti, daoust, emean, e vije bet gwell gantan chom da vevan ha da vervel e kichen e vestr kentoc'h evit mont da eskob. Arôk en em guitât, ec'h ejont o-daou da gonfan ha da gimiadi war lein an dosen a oa 'us d'ar manati. Samson en em lakas da ouelan ken dru ma ruilhe an daerou eus e jodou war an douar ha ma teujont d'ober eno eur ruzelenn dour hag a zo bet hanvet aboue neuze **Gwaz sant Samson**.

Goulenn a reas digant sant Iltud ma vije digaset e gorf d'interi da vered ar manati, mar deuje da vervel en e rôk. Neuze ec'h ejont da gêr Dubrisius, eskob Landaven, evit kêr digantan an Urzou-sakr. Epad ma oant o rei da Samson an Urzou-santel, Dubrisius hag Iltud a welas 'us d'e benn eur goulm gweñnoc'h evit an ere'h.

Neuze en em guitajont: Iltud a distroas d'e gouent ha Samson a drouzas ar mor evit kemer karg eus e eskopti er gêr a Dol.

XI. — SYBLIN, MINISTR AR ROUE MERTHIAN.

Sant Iltud en devoa bet d'ober alies gant tud ar roue Merthian. Syblin, unan eus e vinistred, a oa eun den fallakr; dougen a rê klemm, heb abeg, d'ar roue, o lavaret d'ean e vije e zujidi o laerez anean pe o tismantr e dreo. Ne rente zervij da zen; klask a rê afer ouz an holl ha kasaet e oa gante. Iltud hag e venec'h, evel ar re-all, o devoe d'ober gantan. Hep goût d'ar roue, e c'houlenne digante eleiz a dreo eneb d'ar justis ha d'al lealded. Displegan a rê e gont ken brao d'ar roue ma vije arru fall an neb a deue d'ober klemm eus ar ministr. Doue en em gargas da gastizan anean abalamour m'en devoa grêt droug d'e zervijer Iltud. Eun de m'en devoa c'hoant d'ober d'ar zant, hag a oa dizamm a bep trueaj, paeen kustum d'ar roue, Iltud a nac'has a-grenn ha kercent, Syblin a deuzas eno dirak an holl evel eun tammi koar pa dostaer anean d'an tan. Iltud a bedas Doue da bardoni d'an den-ze, rak goût a rê ar gourc'hemenn zo grêt da bep hini da bardoni d'e enebourien.

Ar roue kounnaret o klevet ar pezh a oa digouezet gant e ministr, a fellas d'ean laz an Iltud hag e venec'h ha distrujan e vanati. Dont a reas keun d'ean da vean-roet d'e ôtrethur da chom eno; gwelloc'h vije bet gantan gwelet eno loened goue evit gwelet ar venec'h santel a dremene o buhe o serviji Doue. Lammat a ra war e armou, rei a ra urz d'e zoudarded da gemer o re hag int, a brez kaer, d'ar manati evit en em venji diouz ar zant.

Iltud, o vean klevet kement-se, a gemeras an tec'h, daoust da lavaret d'ean e vije diwallet diouz pep droug. C'hoant en devoa da vevan e-unan-penn, met doan en devoa da vean kavet ha da vean adlaket da abad er manati. Klask a reas eul lec'h distro awalc'h evit 'n em guz diouz ar bed hag an dud. Dre forz klask, e kavas dindan eur roc'h eul lec'h kuzet mat, war vord ar stêr hanvet Ewenny, hag eno e chomas 'pad eur bla ha tri devez. Kousket a rê war an douar, eur men dindan e benn; eno en em gave evurus, o c'hallout soursial muioc'h-mui eus e zilvidigez. Yun a rê bemde hag e holl amzer a dremene o pedi; bemde ive, wardro nao eur, eun el a digase d'ean eun tamm bara heiz hag eun tamm pesk. Goude ec'h ee d'ar feunteun a oa demdost hag ec'h eve eur banne dour a gemere gant e

zaouarn. Neuze e tistroe d'e lochenn, en eur zellet ervad endro d'ean gant aon na vije bet gwelet gant den.

'Boue m'en devoa kuitaet e vanati, e oa savet klask war e lere'h. A bep tu e vije goulennet diouz e zoare ha furchet e voe kement korn eus ar vro, er c'hoajou hag er mêziou...

Epad ma chomas kuzet e giz-ze, an dud holl a hirvoude; ar re baour, dreist-holl, hag an intanvezed a oa nec'het bras: « Piou, eme, a deuy breman d'hon zikour? Iltud a roe d'imp ar pezh hon dije ezomm; bean a oa Providans Doue en hon c'henyer; bepred e vije laouen ganimp ha kemer a rê lod en hon foaniou. Marteze eman en eur prizon bennak dindan an douar!... Mar deo maro, Doue da roiñ repoz vat d'e ené! »

Keit ma oant o tivizout hag o hirvoudi er stumm-ze, e tremenñs dre eno eur beajour kaset gant ar skriva-gner Gweltas da ginnig eur c'hloc'hig bihan d'an eskob David, en envor eus o anaoudegez hag o mignonij koz. Pa oa ar beajour o tremen gant an hent kichen lec'h ma oa kuzet sant Iltud, ar c'hloc'h en em lakas da zon anean e-unan. Iltud o klevet ar vouez ken koant ha ken sklintin a deuas da gaout an den-man ha dre der gwech e sonas ar c'hloc'h evit klevet gwelloc'h e vouez ken dudiñs. Goulenn a reas digant ar beajour pelec'h ec'h ee ha da biou ec'h ee da gas eun dra ken talvoudus. « Abeurz an den desket bras Gweltas, eme ar beajour, ec'h an da gas ar c'hloc'h-man d'an eskob David. » Derc'hel a reas eta gant e hent ken ec'h arruas en Me-nevent, e ti an eskob, hag e roas d'ean ar c'hloc'h.

David a hinjas hag a vranskellas anean, met kaer en doa ober, ne zone ket. An eskob santel o welet eno eun dra burzudus a c'houlennas, digant ar beajour hag-en n'en devoa ket sonet unan bennak anean keif ma oa bet en hent. — « Eo, emean; » hag hen da gontan petra oa tremenet. Hag an eskob da lavaret: « Hon mestr sant Iltud eo hennez! C'hoant en devoa da gât ar c'hloc'h-man a zon ken koant; n'eus ket kredet hen goulenn dre ma oa bet kinniget d'in gant Gweltas, Doue ne c'houl ket e vefe d'in; distro hepdale da gât an ermit santel ha ro d'ean ar c'hloc'h-man eus ma ferz. »

Ar beajour a zistroas da gât sant Iltud hag a lezas gantan ar c'hloc'h; met en eur arruout er manati, e tisklêrias petra oa c'hoarvezet gantan ha pelec'h e oa kuzet sant Iltud. Ar venec'h hag ar bobl a diredas d'hen kaout, d'ober d'ean distrei gante hag ober d'ean adkemer e garg evel diagent. Iltud, oc'h anaout eno bo-lonte Doue, a zentas ha joa vras a voe en de-ze er manati pa oa adkavet an tad ken karet.

XII. — SEFYJID, MINISTR AR ROUE MERTHIAN, HAG AR ROUE E-UNAN LONKET GANT AN DOUAR.

An treo a gerze mat-tre 'barz ar manati hag ar vro, ken ma teuas Sefyjit, ministr neve ar roue, da 'n em gemer ouz sant Iltud hag e venec'h, abalamour d'al loened a argase bemde eus ar prajeier a vijent laket enne da heuri. Awechou, zoken, e kase anê gantan hag o mire epad tri de, hep rei tamm d'ê; pa loske anê, e vijent ken treut ma vije gwelet o c'hosteiu. Iltud a oa droug ennan, evel just; ne c'houlle ket, daoust da ze, gervel Doue da gastizan ar ministr fallakr-ze, gant doan n'arruje gantan evel gant Syblin; met Doue ne felle ket d'ean e vije grêt poan d'e zervijer hag, eun de ma oa deut adarre Sefygit wardro al loened d'ar prajeier, an douar a zigoras dindan e dreid hag a lonkas anean; lavaret a rêr e weler bepred war an ôd skeudenn an den-ze. Pa glevas ar roue petra oa arruet adarre gant e ministr, ec'h eas ermêz anean e-unan hag, ar wech-man, e fellas d'ean pe lakât d'ar maro pe argas evit biken Iltud hag e genvreudeur diwar e zouarou. Kemer a reas an armou evel ar wech all hag heu ermêz gant e zoudarded. Arruout a reas 'barz ar gouent, met pa oa o vont da skei, an douar a zigoras dindan hag a lonkas anean d'e dro hep ma voe gallet gwelet anean pelloc'h. Doue a ziwalte e zervijer a bep droug.

Ar burzudou a greskas c'hoaz ar vrud eus santelez Iltud; kement a dud a zirede d'e gaout ma n'en dije ket amzer, zoken, d'ober e bedennou evel m'en dije c'hoant; setu perak, evit an eil gwech, e kuitas e gouent evit en em-guz, evel diagent, dindan ar roc'hel grom hanvet Lingarthik; eno e chomas tri bla, o yun, o pedi hag oc'h ober pinijenn hep dibri tamm nemet ar pezh a vije digaset d'ean bemde gant an êl. Eno e c'hoarvezas eur burzud souezus meurbed.

Eun de ma oa azezet war ar roc'hel e welas eur vagig o tont hag o tostaat da ribl ar stêr. Bean oa enni o roenval daou den yaouank kaer meurbed hag er penn arôk d'ar vag e oa eun ôter. Sant Iltud a yeas da benn hent d'ê ha, gant joa vras, o zaludas. Ar re-man a respontas eun nebeut gerioù, met kinnig a rejont d'ar zant eur c'horf santel hag a oa c'houez vat gantan ha, goude bezan disklêriet d'ean korf piou e oa hennez ha difennet outan hen lavaret da dud all, e roenvjont adarre evit pellat.

Iltud a digemeras ar c'horf santel-ze gant doujans vras, a interas anean e kichen ar roc'h lec'h ma oa o chom, a zavas 'us d'ar be eun ôter, evel ma oa 'barz

ar vag, hag adalek neuze e vije gwelet eno burzudou eus ar c'haeran.

XIII. — DAOU LAER CHENCHET EN MEIN.

Eun noz bennak, daou laer a deuas d'ar gouent; hag int da greier ar moc'h ha d'o c'has gante. Ren a rënt anê dre ar c'hoajou ha sonjal a rê gante ec'h eent dre an hent eün. En despet d'ê en em golljont ha, goude bean baleet 'pad an noz, ec'h arrujont 'benn ar beure, gant o moc'h, just 'lec'h m'o devoa o laeret. Al loened skwiz o vean kerzet keit-se a vanas kousket betek pell amzer eus ar beure ken na deuas eur manac'h da digas d'ê boed. An noz warlerc'h, e oant adarre en o c'hraou, pa deuas ar memez laeron d'o c'herc'hat. Ar wech-man e senje gante e oant sur eus o zôl; boutan a rejont anê en o rôk trezek eur mene a anavezent mat. Met evel pa vijent bet harzet da beurober o zorfed, hep goût penôs, an de warlerc'h ar heure, en em gavjont adarre gant o loened 'tal ar c'hreier 'lec'h ma oant bet ouz o laerez. Doue ne fellas ket d'ean lezel hep o c'hastizan an daou laer; chench a reas anê en daou ven bras ha hir a weler c'hoaz el lec'h-ze hag a zo hanvet **Mein an daou laer**.

Barz ar vro e lavarer bepred :

« En daou ven-man eo bet chenchet el laeron moc'h hag e chomfont bepred hep buhe dindan ar glao, an êrc'h hag an holl amzer fall. »

XIV. — SANT ILTUD O VAGAN 'PAD AR GERNEZ TUD BREIZ-IZEL.

Sant Iltud en devoa c'hoant bras da zont da Vreiz-Izel da bedi en iliz Sant-Mikêl savet war ar mene a doug hano an arc'hêl. Bean 'n devoa d'ar c'houlz-ze en e vanati ter c'hrignoliad vat a winiz. 'Rôk mont kuit, e roas urz d'e dud da adwentât an ed-ze ha da adlakat ane er grignoliou.

An abad santel a dreuzas ar mor evit dont da vene Lomikel. E keit-se, e dud a reas herve m'en devoa gour-c'hemennet d'ê.

E Breiz-Izêl, e kavas an dud kastizet gant eur gernez vras ha kalz anê prest da vervel gant an naon. Ar zant a gemeras true oute hag a bedas Doue d'o zikour ha da digas d'ê an ed en devoa lezet en e c'hrignoliou er gêr. Doue a chilaouas pedenn e zervijer; hepdale,

an ed en em gavas war ôd Breiz-Izel. Ar zant a roas d'an dud ar pez o devoa ezomm evit bevan hag; ouspen, peadra da hadan o douarou.

Ne ver ket evit lavaret pegement a stad a voe 'barz an dud paour-ze ha pegement a anaoudegez vat o devoe 'vit ar zant en devoa o zikouret en eur stumm ken burzudus. Ne c'houlleket ket gwelet anean o kuitât : pedi rejont anean da chom gante ha da vevan en e wir vro, p'eo gwir e dad a oa eus Breiz-Izel. Iltud n'asantas ket gante; treuzi reas ar mor evit distrei da Vreiz-Veur ha d'e vanati.


XV. — MARO SANT ILTUD.

Eno e chomas e penn e gouent pell amzer 'c'han ma santas ar maro o tostaat. Fellout a rê d'ean mervel e Breiz-Izel. C'hoaz eur wech eta e teuas da Letavi, hanvet aboue Breiz-Izel, hag eno, er gêr a Dol, e rentas e ene da Zoue er 6^e a viz du.

Eleiz a yurzudou a reas goude e varo a zisklêrias d'an holl e zantelez. E ene a yeas ez eün daved Doue, zo dleet d'ean'doujans, enor, karante epad an holl amzer. Evelse bezet grêt.

XVI. — KLOC'H SANT ILTUD ADDIGASET D'AR GOUENT, EUS LEC'H MA OA LAERET, HAG AR C'HEZEK DEUT DA DALVEZOUT KEMENT AN EIL 'VEL EGILE.

Edgar, roue Breiz-Veur, a yeas en kounnar vras ouz tud bro Gladmorgan dre m'o devoa dizentet outan. Sevel a reas eun arme; rei a reas urz d'ei da vont di ha da zistrujan kement tra a digouezje gante, an ilizou koulz hag an tier. Kloc'h sant Iltud a oa bet ive laeret eus an iliz ha kaset da Vreiz-Veur gant al laeron. Pa oa an arme o tistrei d'ar gêr, kloc'h sant Iltud a voe staget ouz goug eur marc'h a gerze arôk ar roue 'trezek Mene Aour. Ar mene-man a zo bet hanvet e giz-ze abalamour d'an niver bras a zoudarded en em gave eno hag a oa gante gwiskamanchou hag armou alaouret. Tro kreizte, 'pad ma oa ar zoudarded o lodenni an-treo laeret, ar roue hag a oa kousket dindan eun deltenn a zonjas gantan e teue eur zoudard krenv seurt n'eus hini da dreuzi anean gant eur c'hleze. Goulenn a reas digant e dud hag-en n'o devoa gwelet den endro d'ean. Den ne oa bet eno. Ar roue a anzavas neuze e dorfed. Kemer reas doan da vean lôsket laerez an ilizou ha gour-



ILIZ KOADOUT

c'hennenn a reas d'e dud renti da Zoue ha da zant Iltud ar pezh o devoa laeret hag, evit kêr suroc'h ha welloc'h e bardon, e reas sevel eno eun iliz en enor da zant Iltud; rei a reas douar ha peadra da vevan d'ar venec'h a dizervijfe an iliz. Poent oa d'ean goulenn pardon, rak naou devez goude e varvas.

Ar marc'h a oa ar c'hloc'h en e c'houg a gemeras ar penn arôk da retorn da vanati sant Iltud. An holl gezek o klevet mouez skeltr ar c'hloc'h a heuilhas anean betek ar gouent. Ar venec'h ive a glevas mouez o c'hloc'h adalek ma oa ar ru war ribl ar stêr. Mont a rejont a brez kaer da benn hent d'ean ha heuilh a rejont ar marc'h a rê bepred d'ar c'hloc'h sôn ken na oa ar ru dirak iliz sant Iltud. Eno e lôskaas ar c'hloc'h da gouezan rust war ar vein; daoust da ze, ne dorras nemet eun tammik bihan. Joa ha, dudi a voe er gouent dre ma oa distro ar c'hloc'h ha, dreist-holl, dre ne oa ket bet torret o kouezan.

Kaeroc'h evit ze; ar c'hezek o devoa heuilhet ar marc'h a douge ar c'hloc'h a oa ken lijes a hini anê ma oa eul loen kezek evit pep manac'h. Met sevel a reas tabut etre ar re-man da c'houzout piou en dije an hini gwella hag an hini kaeran. Peb unan a lavare d'e dro : « D'in e vo! — 'Vo ket! eme eun all; n'ey ket an treo er stumm-ze! » — An dizintent a badas betek an de warlerc'h ha, nebeut a dra ouспен, e vije bet savet kann etreze.

En de warlerc'h, e teujont adarre d'ar marchosiou da zellet ervad ouz ar c'hezek ha da êsât ober an dibab didrous. Ne oant ken evit goût pehini oa ar c'haeran pe ar gwella : memez talvoudegez a gavent d'ê holl.

Er stumm-ze e fellas da zant Iltud, goude bean rentet e gloc'h d'e vanati, lakat ive ar peuc'h etouez e vugale.

XVII. — MENEC'H SANT ILTUD O TREC'HI WAR EUN ARME SOUDARDED DEUT DA LAEREZ AR VRO.

En amzer ma oa Gwilherm ar Gonezer, (le conquérant) hag ar priñs Robert, mab heman, o terc'hel e blas en Gladmorgan, Sôzon, koulz re tu an Hanter-nôz 'vel tu ar C'hreizte, en em glevas 'vit ober brezel d'an Anglijen ha d'an Normaned. A bep tu e tiredent eus ar c'hoajou; drailhan ha difreuzan rënt kement a gavent war o hent; goude ze en em guzent adarre er c'hoajou-dôn.

War benn ar fin, en em gavent wardro 3.000 soudard prest d'en em dôl war douarou Gladmorgan.

O klevet ze, menec'h sant Iltud hag an dud diwar-dro, o farrouisianiz, a zavas eur c'hleun uhel mat endro d'ar manati ha, tro war zro, a-ziavêz, andouviou dôn; hag i d'en em dastum holl er manati evit en em difenn.

Sant Iltud oa o tiwall e vugale, red ve laret. Ar Zôzon a arruas dirak ar manati diouz an noz. Raktal e krogas ar gann. An enebourien, dre ne welent ket, a gouezas 'barz an toufleou dôn; e keit se, diwar lein ar c'hleun, ar venec'h hag an dud a skoe warnê pèjou mein bras. Ar merc'hed hag ar vugale a dastume mein ha peb unan a laboure eus e wellan. Evit o zikour da gaout an trec'h, Doue a roas da vugale sant Iltud sklerijenn epad ar gann. Leiz enebourien a chomas war an dachenn; o armou a vije torret gant ar mein skoet gante; benn ar fin, ar spont a grogas enne hag e kemerjont an tec'h en eur yudal. E giz-ze, eun dornad tud, dre c'halloud Doue, a drec'has 3.000 soudard. Kaout rê d'ar re-man o dije gallet distrujan ar gouent, met Doue ha sant Iltud a viras na deuje an droug da drec'hi war ar vad.

Hennez zo unan eus ar burzudou souezusan a reas sant Iltud, dambrest goude e yaro.

XVIII. — RELEGOU SANT ILTUD HAG AN DEVOTION ZO EVITAN.

Sant Iltud a c'heller lavaret en gwirione 'n eus hadet ar fe en hon zouez. Ma n'eo ket hen e-unan 'zo deut da brezek d'imp Aviel J.-K., evel e genvreur sant Brieg, hen eo en deus savet ha desket ar zent o deus stummet hon bro da heuilh ar gelennadurez kristen.

Samson, eskob Dol, sant Pôl, eskob Kastel-Pôl, sant Gweltas ha sant David, etc... a oa e vugale. Kement rak-se, e welomp e pep bro ma 'z eo bet ar zent-man o veyan pe o prezek, meneg eus o zad hag o mestr bras, sant Iltud. Barz ar « c'halendrier », — eskoptiou Landreger ha Gwened, — e kavomp e ouel merket da li-dan ar 5^e a viz du, 'dalek ar bla 1457; en hini Kastel-Pôl, ar 7 eus ar memez miz, adalek ar bla 1516; hag e levr « Martyrologe » saoz, e ouel a ve douget d'ar 6 a viz du aboue 1526.

Hennez eo an de a zo miret peurvuian evit e enori e pep levr hag e pep « kalendrier » neveoc'h : e hini Klôd Castellane (1709); e hini Louis-Antoine de Noailles, arc'heskop kardinal Paris (1727); e hini Breiz-Veur, Richard Challoner (1761).

Bean en devoa ive eun ofis penn-da-benn, pe lod eus eun ofis, er breviaiou koz, dreist-holl en hini sant Malo, grêt dre urz an O. Jean du Bec, eskob Sant-Malo, er bla 1603, ha merket ar 7 a viz du.

En hini Kastel-Pôl, er bla 1737, ar 14 a viz du; en hini Kemper, e kavomp adalek ar bla 1840; en hini Kemper ha Leon, adalek 1860 ha 1872, ar 6^e a viz du; en hini Sant-Brieg, e ve grêt meneg dioutan, bep bla, ar 7 a viz du.

En Breiz-Veur, ne gonter ket, gant a zo anê, an ilizou, ar chapelioù 'lec'h ma ve enoret.

En Breiz-Izel zo ive meur a barrouz 'lec'h mac'h eo enoret, met dreist-holl er re-man: Lanildut, eskopti Kemper; Sant-Iltud pe Sant-Ideuc, kichen Sant-Malo; hag en eskopti Sant-Brieg, e parrouziou Landebaeron ha Koadout. Barz an diou barrouz-man en em gav relegou sakr sant Iltud; eno, marvat, e oant bet digaset evit diwall na gouezjent etre daouarn ar Zôzon pe an Normaned a deue gwechall alies da gastizan hon bro. Setu aman an testenien tennet eus **Buhe sent Breiz-Izel** grêt gant Dom Lobineau hag adneveat gant an O. chaloni Tresvaux du Fraval hag a ziskoue d'imp ec'h eo ar re-ze, e gwirione, relegou sant Iltud:

Aujourd'hui, 25 jour du mois de septembre 1828. devant nous, soussignés, J. Lescop, recteur de Landebaëron, Y. Godest, diacre, et J.-J. Bouget, clerc tonsuré, se sont présentés Jacques Le Messager, ancien maire de Landebaëron, et Catherine Le Pierrès, ancienne femme pieuse, demeurant dans le bourg dudit Landebaëron, les deux très dignes de foi. Nous leur avons exhibé une partie supérieure du crâne marqué d'une barre rouge en forme d'arc et un os de bras froissé; ils nous ont assuré reconnaître ces reliques pour être les mêmes qui étaient vénérées avant la Révolution, dans cette paroisse et qui sont mentionnées en l'inventaire des effets de l'Eglise en l'an 1683. Le susdit Jacques Le Messager nous assure avoir lui-même assisté à l'ouverture du chef en argent qui renfermait le crâne sus mentionné et qui était reconnu être le chef de saint Iltud; ainsi qu'à celle du bras en argent qui renfermait l'os qui était regardé comme étant du bras de saint Maudez, abbé, patron de la paroisse. Le même Jacques Le Messager assure avoir lui-même fait construire un chef en bois et un bras en bois pour enfermer les susdites reliques; que le bras en bois s'étant trouvé trop petit, le crâne fut enveloppé d'un lambeau de soie et que l'os du bras fut renfermé dans une ouverture pratiquée dans le bras de bois couvert d'une petite image et d'une vitre. Les deux dénommés ci-dessus assurent avoir parfaite connaissance de tout ce qui est rapporté au présent, et attestent, de plus, reconnaître les 2 boîtes qui renferment d'autres reliques pour être les mêmes qui étaient révérees en la paroisse avant la Révolution.

Le même Jacques Le Messager assure que ces 2 reliques mentionnées en dernier lieu n'ont nullement été touchées pendant les temps de malheur.

En foi de tout ce que dessus, Jacques Le Messager signe avec nous et Catherine Le Pierrès a déclaré ne le savoir faire.

Fait à la sacristie de Landebaëron les dits jour et an.

JACQUES LE MESSAGER; Y.-J. GODEST, diacre;
J.-J. BOUGET, clerc tonsuré, et J. LESCOPI,
recteur de Landebaëron.

M. Denmat, Marc-Marie, recteur de Coadout, ayant demandé et obtenu de Mgr Le Mée la permission de prendre à Landebaëron les reliques de S. Iltud, le 3 juillet 1858, s'est rendu le 6 du même mois dans cette paroisse, accompagné de MM. Jh Michel, maire, et de Y. Chermat, trésorier, pour prendre le précieux trésor, et M. Le Bihan, recteur de Landebaëron, leur ayant cédé une portion assez considérable du chef de leur saint patron, ils s'en retournèrent pleins de joie.

Le dimanche 11 juillet 1858, jour de la fête patronale de Coadout, les saintes reliques de S. Iltud, abbé, celles de S. Laurent, martyr, et de S. Maudez, abbé, les premières dans un médaillon à part, et les dernières dans un autre médaillon, chacun renfermé dans un reliquaire, ont été prises processionnellement au presbytère, immédiatement avant la grand-messe et déposées dans l'église paroissiale, celles de S. Iltud, à ses pieds et celles de S. Laurent et de S. Maudez, aux pieds de S. Samson, pour y demeurer exposées à la vénération des fidèles. Lesdites reliques sont revêtues du cachet de Mgr Le Mée, évêque de Saint-Brieuc et Tréguier, et sont accompagnées d'un écrit signé de lui qui en atteste l'authenticité. Mgr Le Mée a permis de les porter tous les ans en procession le jour de la fête patronale.

(Extrait du Cahier de paroisse de Coadout).

XIX. — SANT ILTUD EN PARROUZ KOADOUT.

Ne zonj ket d'in e ve eur barrouz en Breiz-Izel hag e ve pedet enni sant Iltud evel en Koadout. Houman zo eur barrouz koz hag a oa gwechall, arôk an Dispac'h vras, eus eskopti Dol, eskopti Sant-Samson, Dol, ar gêr ma oa marvet enni sant Iltud. Ha gallout a rêr kredi penôs parrouz Koadout diazezet en eun draonienn goant, pell kaer diouz Dol, a zo gwechall prezeget d'ei an Aviel ha digaset d'ar gwir fe pe gant menec'h pe diskibien sant Iltud; ar re-man, evit enori o zad hag o mestr, a lakas ar barrouz dindan beli an Abad santel.

Al loden vras eus an iliz he deus mogerioù koz koz. Ar venec'h o devoa aman kalz a levé ha parkeier, prajeier ha douar all a doug c'hoaz en amzer-man an hano a Bark pe Prad ar Zant. Parrouz Magor, daoust d'ei da vean peder pe bemp leo diouz Koadout, a rê lod eus ar barrouz ha dizervijet e oa gant beleien Koadout. En Koadout e oa 3 veleg d'ar mare-ze, eur person ha daou gure. Unan anê a zikoure ar person d'ober e labour er barrouz; egile a oa karget eus Magor. Met distrei a rê kazi bemde da Goadout dre an hent a dremen 'tal kichen ar presbiter hag a zo hanvet c'hoaz hirie **Hent ar C'hure**.

Koadout hag ar parrouziou diwardro, ha parrouziou a-bell, zoken, o deus eun devosion vras da zant Iltud. Hed ar bla, pelerined a deu d'ei iliz da bedi anean; met de ar pardon, a ve lidet an eil zul a viz gouere, a ve eno eur pelerinaj kaer. En de arôk, d'abarde noz, e ve kanet ar gousperou kentan ha goude 'c'h eer e prosesion da gregi an tantad ha da gana an **Te Deum**.

Da ze ar pardon, ar belerined a arru abred diouz ar beure. Goude bean klevet unan bennak eus an oferennou a ve lavaret, unan da c'houec'h, eun all da seiz eur, e reont ter gwech tro an iliz pe ar vered hag, arôk distrei d'ar gêr, ec'h eont d'ar feunteun da gerc'hat peb a vuredad dour.

Sant Iltud a zo pedet evit an holl dreo, met ispisial evit al loened. Awechou zo bet gwelet eur penn saout kinniget d'ar zant da ze e bardon.

Setu aman warlerc'h ar c'hantik grêt gant an O. Goasdoue, pa oa person e Koadout, kantik hag a blij d'an holl kanan.

Sant Iltud, pedet evidomp !

F. MENGUY,
Person.



Kantik Sant Iltud

patron Koadout

TON : *O ma ine, kanomp bemde.*

1

Trezek an nenv hag hon patron,
War dioueskel ar beden,
Savomp laouen mouez hon c'halon,
Vit kât bennoz ha souten.

DISKAN :

O Sant Iltud,
Miret ho tud
A bep droug, a bep anken,
Gret ma reno
'N o c'halono,
Fe grenv ha furnez kristen

2

Pemzek kant vla a zo breman,
E oac'h en Bro-Zôz brudet,
A dreuz d'ar c'hantvejou, aman,
Bretoned 'deus ho pedet.

3

'Deus ket ankouet ho poa hadet,
En kalon sent koz hon bro,
Skouer vat, skiancho' kaer meurbet,
Ha santelez war eun dro.

4

Samson, David, Pol ha Gwêltaz
Zo bet ganec'h kelennet ;
Breiz-Izel 'dle trugare braz
D'ar zent, 'peus 'viti stummet.

5

O Sant Iltud gwechall ken mad,
Teurveet c'hoaz hon zikour ;
Reit d'imp kalon, pa vo stourmad,
Da drec'hi peb enebour.

6

Er vamm laket nerz ha dousder
Hag en tad furnez dalc'het ;
Ra 'no karante 'n o c'henver
Ar bugel 'devo savet.

7

Eneb an droug, eneb ar fall,
Ar yaouankiz diwallet,
Rak an dizurz zo dishual,
Ha gantan kalz 've kollet.

8

D'an den a vor ha d'ar zoudard,
D'an divroad, reit skoazel,
Rak alies e kavont stard
Chom fur pell diouz Breiz-Izel.

9

War an den sammet gant an oad,
War ar paour 'c'houl aluzen,
Têlet ive ho taoulagad,
Ret d'ê Esperans kristen.

10

Skuilhet war boaniou ar c'hlanvour
Eur veraden levez ;
'Pal ar maro, deut da zikour
Ine an tremener kez.

11

Pet true ouz an intanvez
'N dro d'ei bugale vihan ;
Douget dorn d'an emzivad kez,
Pelleit dioutan droug ha poan.

12

'N eur dôl evez war hon ine,
Miret ive hon loened.
Ha skuilhet gliz bennoz Doue
War hon farko hag hon ed.

13

Binniget, dreist-holl, Koadoudiz,
A blij d'ê kas d'ec'h peden,
Pa 'z oc'h paeron koz o iliz
Kuzet ken koant en draouien.

14

Sant Iltud, astennet ho præc'h
D'hon zouten, yaouank ha koz,
'Vit chom didamal en pep lec'h
Ha gonit ar Baradoz.

Y.-M. G.

Imprimatur

Brioci, die 17 Maii 1910.

Y.-M. LE PENNEC,

v. g.